

CHIBOUDIG

Kanaouenn evit ar vugale


Ton ha komzoù gant Jakez KONAN



Ur c'hi bi-han am eus bet,



Gwenn ha du ha me-len eo; Neb-lec'h n'eus loe-



nig e - bet A ve ken kaer liv e vlev

1

Ur c'hi bihan am eus bet;
Gwenn ha du ha melen eo;
Neblec'h n'eus loenig ebet
A ve ken kaer liv e vlev.

2

Va c'hi koant n'eo nemet miz.
C'hoari 'ra ha lammat 'ra,
Hag a-wechoù 'krog em biz,
Pe e harzh evit netra.

3

Pa glask kregiñ en e lost,
Pegen fentus eo va c'hi:

Kouezhañ 'ra bep tro, pe dost,
War e gein pe war e fri.

4

En ur plad e tebr e yod,
Evel don-me ha va breur!
Hag e lip ivez va jod,
Pa c'hoariomp war al leur!

5

Me a gar va loenig koant,
Va Chiboudig, va c'hi brav;
Hennezh, sur, 'zo diouzh va c'hoant,
Ha ganin 'chomo atav.